

ARVOR

Koumanant-bloaz : 50 lur —
SKRIVEREZH HA MEREREZH
G. BERTHOU, 72, Str. Oberthür,
Roazhon (K.R.P. 492-98, Roazhon)

KAZETENN SIZHUNIEK

N'ANKOUNAC'HAIT KET kas
C'HWEC'H REALAD timbroù pep
gwech ma fell deoc'h kemmañ
ho chomlec'h.

Kasit ho skod,
en anv Doue, da
gef "Brezhoneg
ar vugale!"

ENKLASKOU "ARVOR"

DIWAR-BENN TABUT AN ANVIU SKIANTEK

Dre amañ, evel e kalz lec'hioù
e Breizh-Izel, e vez troet an dud
a gomz brezhoneg da lakaat
gerioù estren en o frazennoù,
dreist-holl gerioù gallek. Klevet
e vez lod o tistagañ pennadoù
frazzennoù evelhen : « Beau
temps a vezo », « Kenavo, Mon-
sieur », « Bonsoir, Itron » h. a.
Daoust hag ur c'hounidigezh eo
an dra-se evit hor yezh ? D'am
meno, n'eo ket; ur c'holl, ya, ne
lavarant ket.

A-hend-all e kav din ez eus en
hor yezh trawalc'h a c'herioù
estren gwisket en un doare dem-
vreizhek. Ne dalv ket ar bñan
kreskiñ an niver anezho, pe ma
kendalc'homp da zegemerout ge-
rioù estren, a-benn ur pennad,
ne vezo ken ar brezhoneg ur
yezh keltiek e nep doare.

Gouzout a ran e vez implijet
ar gerioù etrevroadel, er yezhoù
all. Met evit an dra-se n'eo ket
ret deomp ober evelto. Ma te-
gomeromp gerioù etrevroadel en
hor yezh evel ma ra yezhoù 'zo,
dre ma kresko niver ar re-mañ,
e teulo ar brezhoneg da vezañ
dem-heñvel ouzh ar yezhoù all.
Ne vezo ket a gemm etre ar
yezhoù, evit ar gerioù uhel.
Daoust hag an dra-se eo e klas-
komp ? Pe sikour sevel ur yezh
etrevroadel pe saveteñ hor brez-
honeg ?

Ouzhpenn-se ne dalv ket ar
boan kaout ur yezh evidomp hon-
unan, ma rankomp mont da di
an estren da glask gerioù evit
displegañ tra pe dra.
Setu eta va menozh displeget
frazeh.

Ur yezh hon eus, emae o klask
he saveteñ hag he lakaat e doare
da vezañ implijet evit an traoù
uhel evit an holl draoù all.

Klaskomp etouez hor gerioù,
pe furmomp gerioù nevez evit
envel traoù ha n'o devoa ket
betek-hen o lec'h en hor brez-
honeg.

Dilezomp a-grenn, krak ha berr,
an holl gerioù estren, gallek,
etrevroadel h. a. Ha brezhoneg
e pep lec'h, ur brezhoneg flour
ha reizh, ennañ gerioù gwisket
en ur stumm breizhek.

Yann AR CHOUAN.

Selaouit 'ta ! Bodadeg veur ar brezhoneg er skol


Bodadeg veur « AR BREZHONEG
ER SKOL » a vo dalc'het e Gwened
e-pad ar gouelioù bras aozet gant
« BODADeg AR SONERION » e kêr-
benn Bro-Wened an 3 ha d'ar 4 a
Vezeven.

(Kendalc'h p. 2.)

SKLAER HA NAET

gant G.-B. KERVERZIOU

An holl a oar e vez stummet an
den ha spered an den gant e zoare-
bevañ, gant e di, e vro, e vicher,
kerkoulz ha gant an dud m'eo bet
ganet diwarno. An hererezh, da la-



Dor Brizeug, anvet
ivez Dor ar Bourev, e Gwened

Soubet e oant en drantañ bannoù-
heol a welis biskoazh. Bevet em

boa bloavezhioù e kêr-benn Neve-
noe, ha fougeal a c'hellan ez ana-
vezan Gwened koulz pe welloc'h,
abalamour d'am micher, eget Gwe-
nediz o-unan. Krediñ a rae din,
koulskoude, e welen evit ar wech
kentañ an daolenn-se hep he far :
taolenn diwirion, — ken barr e oa
gant ar gened, — ar stêrig Marl, e-
kichen ar poull-kannañ, etre ma-
roñsenned bras an dorgenn, glas

gant Youenn DREZEN

ken e oant glas, hag ar mogerioù
kozh gant o zourioù, o c'hranelloù
hag o balegoù-tarzhell. Ha, du-se,
en tu-all d'ar mogerioù, tolzennad
goñs an iliz-veur, e-kreiz tropellad
stank an tiez treuz-didreuz, lod
gwenn-razet, lod all louet ha kra-
mennek dindan o zoennoù mein-
glas o lintrañ.

Pebezh peoc'h, ar mintinvezh-se,
e Gwened, ha na yaouank ha fresk
e oa ar gêr gozh !... Un dudi ar
c'haout anezhi, e-giz mousc'hoarzh
ur wreg ugent vloaz.

...Hag e-lec'h mont d'am c'hef-
dioù ez is d'ober tro ar mogerioù.
Tre ma'z aen e tifoupe em eñvor,
gant nerzh diharzus ar mor, lan-
vad an darvoudoù a vo stummet
ganto buhez milvedel doujusañ kêr
a zo dindan heol bro-Vreizh. Ne
raimp nemet ur meneg da dorgenn
Sant-Padern, a welas taniou-kamp
lejonierien Kaezar, ha, war ar
Menez, da Di-Bank ar « Crédit
Nantais », savet war vein-font ar
c'hastell ma voe sinet e 1532, dirak
ar roue Francez I-añ ar Feur-Eng-
lev a stage dugelezh Vreizh ouzh
kurunenn roue bro-C'hall.

Setu, avat, war an dorn dehou,
en ur ziskenn gant straed ar Menez,
un Nor ardamezet, e mein du fetis :
hec'h anv, Dor an Hanter-Noz, pe



Tour ar C'honestabl, gwelet
diwar laez ar Waremm

ivez Dor Brizeug, dre ma vevas sko-
enni, pa oa studier e Gwened, ar
Barzh e vlev melen. Un anv all he
deus, spouronusoc'h : Dor ar Bou-
rev, rak e lojeiz en doa bourev-kêr
en ur pikol tour, ne weler ket di-
war ar ru, kennebeut hag ar mo-
gerioù, gant an tiez a zo bet savet
er foziou. (Kendalc'h p. 2.)

AL LABOUR-DOUAR

Ar c'herc'h, ar saout hag al.. loar

Tennañ a reomp ar pennadoù-
mañ da heul diouzh-ul lizher a zo
bet skrivet deomp gant unan eus
hol lennerien a vro-Leon.

« ...Kement ha din bezañ kouer
e teraouan en ur gomz diwar-benn
ar « C'houer Kozh ».

« N'eus ket pell eo bet embannet
war Arvor ar brezegenn bet graet
gantañ, e « Roazhon-Breizh », di-
war-benn ar C'herc'h. Hogen, war
ar pennad-se, n'am boa gwelet,
m'am eus soñj mat, netra a-zivout
kleñved ar c'herc'h; perak e vez
falloc'h ar c'herc'h war vord an
aod eget en Argoad, er bloavezhioù
ma vezont taget; perak ha penaos
e krog ar c'hleñved-se er c'herc'h
ha ne grog ket en edoù all; penaos
e vije gelllet enebañ ouzh ar c'hleñ-
ved-se.

Mat e vije d'ar « C'houer Kozh ».

AN AMZER O TREMEN

E bro-Grim (Crime), en U.R.S.S. eo
bet dilezet kêr Sebastopol, gant an
Alamaned ha Roumaniz, naren, avat,
hep bezañ dalc'het penn ouzh ar Vol-
cheviked e-pad 22 devezh. Un nebeut
deizioù, goude-se, o deus Roumaniz
hag Alamaned kuitet evit mat gou-
renez bro-Grim.

En ur penn pont war ar stêr Dniestr,
ar Rused a zo bet gwallgaset dezho
7 divizion soudarded war droad. Kol-
let o deus ouzhpenn 2.600 prizoniad,
milioù eget 600 pezh-kanol, 334 min-
drañherz hag ur bern pourvezioù-
brezel. Heñvel e-tal kêr Polosk. Eno
o deus ar Vokheviked kollet 6.000 den
lazhet, 6.700 prizoniad, ur bern ar-
moù ha kreñvelc'hioù.

ken barrek war ar vicher, ha ken
desket e pep feur, ober deomp ur
brezegenn diwar-benn « Al loar
hag ar gouerien vrezhon ». Daoust
hag, e gwirionez, e vefe e-fedus al
loar war an hadoù, an drevadoù ?
« Bev-buhezek eo c'hoazh da
vihanañ ar gredenn-se ganeomp,
kouerien a Leon. Da skouer, ne vez
ket hadet a velchon er c'hresk-
loar; atav en diskar, rak re ar
c'hresk a zo gventus, a damaller.
Pa vez plantet patatez er c'hresk-
loar, e vez brasoc'h ar patatez, ne-
met muioc'h a doullou enno.
Anaout a ran-meur a rumm, ha ne
hadont nemet nebeut a dra dlouzh
ar c'hresk loar.

« Tamall a reer ivez, da lod tud
bezañ « loariadenn »; pa vez brav
al loar, e vezont speredet diskar,
hag, er c'hontrol, pa vez en diskar,
e vez diaesoc'h tostaat outo !!!

« Ur gêr bennak a lavarint ivez
diwar-benn ar saout. Ar ouenn eus
ar saout ne da ket ken buan war
wellaat ha hini hor c'hezeg, hag
aes eo melzout perak. Ar mire'hed
evit ar « Reproduction », — ar
gouennañ, — a rank tremen dre ar
merk; setu ma n'eus nemet mir-
c'hed mat, koulz lavarout; e lec'h
m'en deus pep hini ar gwir da ori-
nañ gant e dir, ar pezh a zo fall,
rak gwelet e vez, a-wechoù, tirdi a
ouenn fall kenañ, oc'h orinañ kalz,
war zigarez m'eo gwelloc'h mar-
c'had.

« Ret e vije ober evit an tirdi un
dra bennak damheñvel ouzh merk
ar mire'hed; evit ar moc'h eo
memes tra... ».

Y.-L. AR BARZ.

FRAMM KELTIEK BREIZH Roll Kendalc'h Miz Mae 1944

Graet e vo Kendalc'h bras ar
Framm Keltiek e Roazhon, d'an
18, 19, 20 hag 21 a viz Mae.

Setu amañ ar roll (a c'hello
bezañ kemmet hervez an dar-
voudoù) :

- I. — ABADENNOU EVIT AN HOLL
 - Yaou 18, 20 e. 30 : Sonadeg vras er C'hoariva.
 - (Gant skoazell Laz-Seniñ Roazhon-Breizh.)
 - Sadorn 20, 20 e. 30 : Kaniri, Binlou ha Pezhioù-C'hoari.
 - (Gant J.-M. Synghe ha Roparz Hemon.) Er C'hoariva, gant skoazell Bodadeg ar Sonerion ha C'hoarierion Roazhon-Breizh.
 - Sul 21, 10 e. : Bodadeg Veur Iziñ Framm Keltiek Breizh.

- II. — ABADENNOU BREZHONEK
 - Gwener 19, 15 e. : Ar Geltiegouriezh e Breizh : Pelec'h emaoimp ?
 - A) Yezhoniezh. — 1. Geriadurezh; 2. Yezhadurezh; 3. Sonia-douriezh; 4. Kembraeg; 5. Kerneveg; 6. Iwerzhoneg.
 - B) Lennegezh. — 1. Studi hol lennegezh; 2. Studi al lennegezhioù keltiek all.
 - K) Skourroù all ar geltiegouriezh.
 - Sadorn 20, 11 e. : Ar Framm Keltiek hag ar Brezhoneg.
 - A) Embannerezh. — 1. Aoza-dur al levrioù; 2. Ar c'helaouennoù.

- 15 eur :
 - b) War-du krouidigezh ur Skol dre Lizher evit ar vugale.
 - k) Skol-hañ ar vugale.

- III. — ABADENNOU GALLEK
 - Yaou 18 :
 - 15 e. : Nevezadur Arz ar Bobl (Jorj RUAL).
 - 16 e. : Enklask war an orna-durezh vreizhek (Stany GAUTHIER).
 - 17 e. : Evit ul lennegezh-vro (Fl. Le Roy).

- Gwener 19 :
 - 10 e. : Ar Vrezhoneg divroet e Mervent Bro-C'hall (an Itr. J. NIZAN).
 - 11 e. : Roazhon e amzer an Duged (X. MARION-LEBASTARD).
 - 15 e. : BODADeg AR VICHE-ROURION. — Micher ar Gador (PERROUIN). — Ar vicherourion diwar ar maez : petra int ha petra e c'hellont bezañ (R. TULLOU).
 - Sadorn 20, 9 e. : Yaouankiz.
 - « BODADeg AR SONERION ». Evit mirout hor savadurioù (A. Dezarrois).
 - 15 e. : Bodadeg « Kreizenn Studi hag Enklaskerezh Breizh-Uhel ».
 - 16 e. : Lennegezh c'hallek Breizh oc'h adsevel (Yann Merrien).
 - 17 e. : Tisavouriezh ha Keroniezh (Y. HEMAR).

Ar brezhoneg er skol

AR BREZHONEG ER SERTIFIKAD

Evel m'eo bet divizet gant Ministr an Deskadurezh d'ar 1-añ a viz Kerzu 1943, o vo er bloaz-mañ un amprouenn vrezhonek direl er sertifikad, e pemp departamant Breizh.

Un amprouenn dre skrid o vo. Bez' e vo anezhi ur skrid eun da drefi e gallek diwar ar brezhoneg (8 linenn d'ar muiañ), hag ur skrid gallek da drefi e brezhoneg (2 linenn d'ar muiañ). An notennoù a yelo eus 0 da 10, ha ne vo dalc'het kont evit an arnodenn nemet eus an notennoù uheloc'h eget 5.

Tennañ a reer evezh ar skolaerion hag ar skollidi war dalvoudegezh an amprouenn-se.

Goulenn disklêriadurioù digant AR BREZHONEG ER SKOL, 18, straed ar Moneiz, ROAZHON.

E-harz tourioù Kêr-Wened

(Kendalc'h ar baj. 1)

Ret deomp diskenn, d'o adkavout, betek Dor waregek an Naoned. Brudetoc'h eo an Nor-mañ, hag an daou-Dour ouzh he harpañ, evel Dor ha Tourioù Prizon, ha c'hoazh Dor ha Tourioù an « Emigreed ». Eno e voe bac'het, kent brezañ fuzuliet, war dorgenn ar Waremm, nepell alese, ar 16 a Dhermidor, Bloavezh Tri, ar c'hont Charlez Sombreuil, an Ao. de Hercé, eskop Dol, ha 14 beleg hag ofiser, eus ar re a oa bet prizoniet gant ar jeneral Hoche, e Kiberen.

Pelloc'hik emañ Tourig ar Merc'hed (ar merc'hed gastik, eveljust). An tourig-se, a zo harp, evel dre c'hoaperezh, ouzh Straed ar Gwer-c'hezad, e veze kraouiet enni al lammanned, ar plac'hed skañv, a gemere re a blijadur gant o c'horf. Alese, evel Tantalus gwechall, e klevant an noblañsoù yaouank o ribotal, hep truez outo, en hotel Jeruzalem.

Tostik da Dour ar Merc'hed, emañ gwintet uhel Tour ramz, ledan ha lore'hus ar C'honestabl. Eno, hag ivez war leurenn an Ti-Kêr, e-lec'h m'emañ sonn war e varc'h arem gant e gleze en e zorn, e chom bev-buhezek eñvor ar Richemont taer, kencil Janed Arc, ha gwall-zistrujer Saozon, a voe da vezañ dug a Vreizh, dindan an anv a Arzhur III.

Deomp e-bioù d'an Dorig-Kuzh, ha n'eo ket mui kuzh tamm ebet, a-zioc'h poull-kannañ ar Waremm. Lezomp ivez Maner an Erminig a voe savet gant an Dug Yann IV, an Alouber, ha deomp da saludiñ, e leur un ostaleri, ur pikol tour all : Tour an Trompilh, anvet ivez Tour ar Gedour, dre ma veve eno ar c'hedourien a eveshae ouzh ar mor. Gouzout a reer e teue al lanv, gwechall, da lipat traoù mogerioù kêr. Evidon-me, e kred din e klevan, a-wechoù, trompilh ar gedour oc'h embann donedigezh, war e vag, ar manac'h katalat, sant Visant Ferrer, abostol bras bro-Wened.

Nepell diouzh an Tour, emañ Dor Sant Visant etre ar porzh ha kreiz-kêr. En un ti kaer a-dreñv an nor edo o chom ar jeneral Hoche, e-pad brezelioù ar Chouanez.

N'em eus ket amzer da zarem-prediñ hiroc'h an testoù hael-se eus un Istor fromus. Lezet e vin avat da dennañ un doare kentel eus an droiad hon eus graet asambles en-dro da vogerioù ha tourioù kêr-Wened.

Nemet e-tal ar Waremm, evel ma'm eus lavaret, kuzhet eo mogerioù ha tourioù gant tiez savet e-harz o zreid. Evit arvestiñ outo eo ret mont e porzhioù, goude bezañ goulnet an aotre, pezh a c'hell bezañ kasas. Soñjomp en un dra : n'eus

e Gwened na kenwerzh bras na labouradegoù. He brasañ pinvidigezh a zo, hep ket a var, engroez an Douristed, rak bez' eus anezhi ivez an Nor digor war ar Mor-Bihan hag e ceneznoù mezevellus. Da Wened d'en em aozañ e sell eus dedennañ an Douristed ! N'in ket betek goulenn ma vo toulet en-dro ar blasenn ha lakaet ar mor da zont en-dro da lipat mogerioù kêr. Un dra, avat, a vo da ober dizamant : pilat tiez Straed ar Menez ha re ar Blasenn Gambetta, dirak ar porzh. Neuze e skedo kêr-Wened e kened he sae mein romantek, hag e vo seul hoaluso'h a se.

ROAZHON-BREIZH

SUL 21 A VIZ MAE 1944

19 e. — Deiziadur Jakez Morvan.
19 e. 03. — Kendalc'h ar Framm Keltiek, e Roazhon.

LUN 22 A VIZ MAE

Al Labour-Douar

19 e. — Kaozeadenn gallek.
19 e. 08. — Kaozeadenn ar C'houer Kozh.

MEURZH 23 A VIZ MAE

Kendalc'h ar Framm Keltiek

18 e. 30. — Sonadeg vras ar C'hendalc'h : Oberoù Gwion Roparz ha Rene-Baton, c'hoarriet gant Jaz-seniñ Roazhon-Breizh dindan blieniadur M. Henderiek; ouzh ar piano : an Itr. Pennequin.
19 e. 30. — Kardeur Breizh ar Mor.

MERC'HER 24 A VIZ MAE

Breizh ar Micherioù

19 e. — Paotred ar Maen-greun e Foujera (G.), gant Julieta Nizan.
19 e. 30. — Micherioù hor bro : ar Voiaouerien-Goad (B.), gant Ker-verzioù.

YAOU 25 A VIZ MAE

Kardeur ar Brezhoneg

19 e. — Kentel vrezhonek A. Gelleg.
19 e. 08. — Dre hol lennegezh, gant Y.-B. Kerdilez (G.).

GWENER 26 A VIZ MAE

Ar Vuhez Keltiek

19 e. — Sent er straed (G.), gant Jord Ar Mee.
19 e. 08. — Istor ar C'hembraeg : an deizioù du (B.), gant P. Mocaer.

SADORN 27 A VIZ MAE

Kendalc'h ar Framm Keltiek

18 e. 30. — Eil rann Sonadeg vras ar C'hendalc'h : Oberoù Gwion Roparz ha Rene-Baton.

Kardeur ar Framm Keltiek

19 e. — Salaun, roue Breizh (B.), gant P. Ar Floch.
19 e. 08. — An Doktor Jobert, medisin (G.), eus Lambal, gant Mari Drouart.

MA N'HOC'H EUS KET AON

... DA C'HOARZHIN

LENNIT

AN TI SATANAZET

gant Jakez RIOU

Priz 46 lur

SKRIDOU BREIZH BREST

Ur grib, mar plij da Lan hag Hervé !

Un tamm brav a vrud o deus gounezet Lan hag Hervé, war La Bretagne, gant o spered lemm hag o doare dezho o-unan da wiskañ rimadelloù. Nevez 'zo e roent deomp zoken un duilh divunadennoù sasun.

Houmañ da heul, avat, petra sonjit diwar he fenn ? He gavet em eus war niv. an 9 a viz Mae diwezhañ. Evit un divunadenn, sell aze un divunadenn !... Lennit, kentoc'h ! — N'am eus ket lavaret : komprenit !

Bez e vefe meur a dra da lavaret war distagadur ar galleg gant paotred Radio-Paris... ha war ar yezh implijet ganto end-eeun, n'eo ket atav anezhi ur yezh eus deoc'h ? An anvioù ad-dolio; distinget, 'gav ket a vez graet anezhañ Bagwir Italianed. Badoglio tuno ha Cas'sino, evel feiz, nann ! nemet Nel'ha Cas-si-no a lavaront, all ! N'eo ket Nel-tu-no gant Nettuno, Cassino hag O c'hlevit 'ta, o tistateu ganto ar gerioù-se ! brav, na pegen mistr e skouer. Tudou na pegen Gerioù italianek, sa d'o farant, traken ! gredont un tamm lufr gwech all evit reiñ (a estren, gwech diouzh rei, da ober implij eus gerioù teu dezho, hiziv an deiz, ar re flourañ, pell ac'ha-no ! Estreget ar galleg e n'ank a vez « distripet ». evel ma lavarer du-mañ, « brav kenañ ganto, ha zoken ar gerioù saonek... ur wech an amzer, h. a... »

Ur fazi e roll al linenoù ?... Re a goustiañs o deus renerien ha moulerien kazetenñ La Bretagne, re a zoujañs a vagont evit ar brezhoneg, anat d'an holl; n'eo ket i a rafe goap ouzh o lennerien brezhonek; n'on ket evit krediñ e vefent ken difoultr gant skridoù hon daou genver.

Nann ! dirak un divunadenn emaoamp... Piv a zegaso ur grib d'he dirouestlañ ?

PER ha PAOL.

Bodadeg veur ar Brezhoneg er Skol

(Kendalc'h ar baj. 1)

Prezegenoù a vo graet e brezhoneg hag e galleg. Ar roll anezho a vo embannet ar sizhun a zeu.

Pedet eo holl izili « AR BREZHONEG ER SKOL », an holl Guzelioù-Kêr o deus votet a-du gant ar brezhoneg, hag holl vignoned hor yezh.

Bez' e c'heller mirout ur gambr en a-raok, dre skivañ ar c'hentañ ar gwellañ d'an Ao. L. Gueguen, sekretour-meur ar gouelioù breton, 13, Leurenn an Ti-Kêr, Gwened.

Labour a vo graet, ha berr-amzer a zo da gaout !

SKLAER HA NAET

(Kendalc'h ar baj. 1.)

N'eus forzh, bez' e kendalc'hin : gwir en deus an artizan hag e gompagnoned da vevañ ha da labourat e lec'hioù sklaer ha naet, kompenn ha plijus da welout. *Seul welloc'h a se al labour*, seul aezetoc'h ivez, ha setu. Aotrounez an ijinerezh bras o deus komprenet an dra-se pell 'zo; gouezet o deus kaeraat ha yac'haat o uzinoù di-vent : muioc'h a c'houlou, muioc'h a aer vat, tommañ gwelloc'h diouzh ar goañv hag a-wechoù yenaat e-keiz an hañv, hadañ bleunioù amañ hag ahont, bleunioù pe pradadoùigoù leton gwer d'ruz, ken plijus ha ken diskuizhus d'al lagad, — mil ha mil tra all heñvel pe heñveloc'h. Ha gwellaet eo bet o gounidigezh, daoust d'an dispignoù o doa graet, dispignoù pouner a-walc'h a-wechoù !

Aes her c'hompren. Daoust ha ne vez ket labourer gwelloc'h hag aesoc'h pa vez graet gant plijadur ? Daoust ha ne vez ket labourer primoc'h pa vez an trgoù kompenn hag en o rez, binvioù hag all ? Ha gwel e kavfec'h labourer evel micherourien wechall ouzh skleur ur goulou-lutig eget ouzh goulou kann ul lamp-tredan ? N'eus poan ebet da zivout ho respontoù, micherourien ger. — ha koulskoude ! Nag a brenestrou lous, du, leun a wiad-kevid... nag a lampoù bihan disklair pell diouzh danvez al labour... nag a vogerioù du-pod gant poultre ha koc'hion... nag a staliou stlabezet enno binvijer, danvez ha traoù all a-vern... Me 'gave din e rae an artizan labourer kaer ha kompenn ? penaos hen ober e seurtoù tiez-labour ?

Evel just, ker e koust lakaat lampoù nevez a-ere neudennoù elektrik hiroc'h, gwennrazañ ar mogerioù bep bloaz, naetaat ar gwerennoù diabarzh ha diavaez ha lakaat reoù nevez e-lec'h ar re dorret, ha lakaat bleunioù amañ pe aze diouzh ma vo tu war varlenn ar prenester. « Re e koustfe; ne c'hounezan ket a-walc'h », set ar respont gozmolet ho peze peurliesañ, mar klasec'h goulnenn un dra bennak evel-se digant ar mestr-micherour.

Pegen kalet bennak e c'hell bezañ an divroañ, pegen diblijus bennak eo mont da labourer en Alamagn pell diouzh ar vro, peadra a zo du-se da zeskiñ bepred d'ar re a oar digeriñ o daoulagad e-lec'h mouzhañ... Anavezout a ran micherourien hag a zo aet du-se, hag o deus bet plijadur o labourer o labouradegoù pe e staliou bihan, ne vern, hogen holl e oant sklaer ha naet, holl e oant kompenn ha plijus, gou-

lou e-leizh, tamm traoù lous ebet en atilheroù, armelioù kompenn da glenkañ an dilhad labour, liorzhoù en uzinoù bras, bleunioù en ur c'hased bihan er staliou bihan, setu ar pezh o deus gwelet, setu ar pezh a fello dezho kaout hiviziken pa zeuint en-dro da labourer er vro, hag ar wirionez a vo ganto ! Daoust ha ne vefe ket ar Vretoned gouest d'ober kemend-all ? N'on ket evit krediñ.

(Displeget e Roazhon-Breizh, ar 17 a viz Mae 1944.)

Ar brezhoneg er skol

Kenstrivadeg fin ar bloavezh

AR BREZHONEG ER SKOL a sav evel warlene ur genstrivadeg war ar brezhoneg etre holl vugale skolioù ar gouarnamant a vez graet skol vrezhonek enno hervez lezenn g-Caropino eus ar 24 a viz Kerzu 1943.

Damheñvel e vo ar genstrivadeg-se ouzh amproenn vrezhonek ar serti-fikad. Bez' e vo anezhi ur pennañ brezhonek da dreñv e galleg, ur pennañ gallek berr da dreñv e brezhoneg, ha daou c'houlenn eoun diwar-benn an istor hag an douaroniezh.

Ur renkadur dre skolioù a vo da gentañ evit goprañ ar vistr. Bez' e vo daou briz 2.000 lur, 2 briz 1.000 lur, 4 briz 500 lur, h. a. Renket e vo ivez ar skolioù unan-hag-unan, ha roet ur priz a-ratozh d'an daou hini kentañ. An darn vluñ eus ar skolioù o deve kemeret perzh er genstrivadeg a re-sevo ul levrlinniget gant AR BREZHONEG ER SKOL pe gant BREZHONEG AR VUGALE.

Ar varnerion a vo anvet gant ar gefaouenn AN EOST.

Goulnenn diaktoriadurioù digant AR BREZHONEG ER SKOL, ROAZHON.

D'ur plac'h yaouank o kutuilh bleunioù da serr-noz

Perak el liorz, damstrewet a noz, perak o kutuilh, habask bepred, eqst diwezhañ an deiz a vleunioù peurligoret gant an heol [o kilmadif ?

War wrimenn an noz, Stouet da benn, poellek ha fur perak o tibab ar gened varv, pa gren an oabl gant skleurlou espar [dianav ?

Perak er skeud, o plac'hig aketus, enkl, bihanik, o kas a vriadou ar gened aner d'ar c'hambroù serret-mat, tra ma trollell a-us ar c'horoll sebozus [flamm ?

Roparz HEMON.

(BARZHONEGOU, Skridoù Breizh.)

Embannet ha Merour ; Gw. BERTHOU. Kasadenn-lezenn : 2^e trimizad 1944. Niv.-voulañ : 2; niv.-embann. : 1. TI-MOULEREZH KREIZ-KÊR ROAZHON Aotre : P. C. 520.

Ur Stroad kontadennoù dispar :
KONTADENNOU A VRO-SKOS
Lakaet e brezhoneg gant R. HEMON
Skeudennoù gant Joel PHILIPPON
PRIZ 331. 50
SKRIDOU BREIZH, BREST

MA N'HOC'H EUS KET AON ... DA C'HOARZHIN
LENNIT
AN TI SATANAZET
gant Jakez RIOU
Priz 46 lur
SKRIDOU BREIZH BREST

ROAZHON
DOUARIDIGEZH. — D'ar sadorn 13 a viz Mae e voe douaret e Bred ar Retar, ar soudard brezhon Aoustin an Deuñv, eus Mael-Karvez, marv evit ar vro.

Skrivit chomlec'hioù ho lizheroù e brezhoneg !

BOUDIG AN AOD

NIV. 40

gant Paol FEVAL

Aozet e brezhoneg gant Per DENEZ

Dahsomp al litra
Litra lilanlir
Dahsomp al litra
Litra lilanta.

« Al litra, evel ma ouzoc'h, a zañser en ur skeiñ e seulioù en a-dreñv. Anavezet em eus, e bourc'h Baeñs, un troc'her kelc'hioù prenn kistinenn evit an tonelloù hag ar barrikennoù hag a ouie dañsal al litra, ur marzh. A zek lev tro-war-dro e teued d'e welout. Born e oa : Pelo Halluin a raed anezhañ. E c'hoar Matilina a wrie gouelioù evit ar bigi er Roc'h-Bernarz; fortunian a reas gant Julian Ar Gwenneg, lesanvet ar C'hamm en abeg d'e ziouhar hag a oa a-dreuz. Ar Pelo Halluin-se, met eus ar breur mat Eustach eo a felle din komz. »

« — Petra a lavaren deoc'h ? » a silas Aobri e skouarn an Ao. Huon.

Mouse'hoarzhin a reas ar c'hozhiad. A-hervez en doa komzet dija Aobri eus ar breur Brunev hag eus e istorioù.

« — Neuze », e kendalc'has Brunev, « ur paotr yaouank sart ha dilu e oa ar breur Eustach... »

« — A-walc'h evel-se, breur Brunev ! » a droc'has an Ao. Huon.

Sac'hañ krenn a reas ar manac'h kaezh.

« — Ha feuket em befe va Aotrou mat ? » vesteodas.

« — A-walc'h evel-se, pa lavaran deoc'h. Permetiñ a ran deoc'h chom ganeomp. »

Silakan a reas Brunev e zaouarn en ur grial gant ar joa.

« — Un diviz a lakan, avat », a stagas Moreover.

« — Pehini, Aotrou, pehini ? »

« — Arabat e vo deoc'h, keit ha ma chomot amañ, kontañ istorioù, ha pa ve unan hepken. »

« — A ! » a grias ar manac'h en ur c'hoarzhin gwalc'h e galon, « setu, feiz, un dra na vo ket diaes ! Hag e kred deoc'h ez on un teodeg, Jezuz ! Se a zegas da soñj din un avantur a zegouezhas ganin en un tavarn eus kêr Gwitre. Tri e oamp,

va c'henderv Yann, Mikael An Hir ha me. Ha me ha lavarout da Vikael An Hir : Mikael, va faotr, ha klevet ec'h eus kontañ istor noter Lambal hag a... »

Troc'het e voe e gomz dezhañ gant c'hoarzhadeg an holl.

Perak e c'hoarzhed ? Ne voe ket ar breur Brunev evit hen divinout.

« — M'ho pije gortozet un tammig », emezañ, « va istor an hini en defe ho lakaet da c'hoarzhin. »

XXVIII

Habask a-walc'h e chomas da gentañ ar marc'heg Melear pa voe bet sparlet en toull-bac'h. Goude-holl, n'oa nemet un eurvezhioù bennak da dremen amañ.

Tremen a rae an eurvezhioù, avat, hag e teue ar marc'heg Melear da skuizhañ. Dek eur diouzh ar mintin e oa p'en doa Aobri amprestet dre heg e zilhad digantañ. E kloc'hdi ar manati e sonas kreisteiz, goude un eur, ha goude div, ha goude teir.

Fidamdoustik ! Broueziñ a rae ar marc'heg Melear.

KELEIER EUS AR VRO


MERZHERENTI KÉRIOU BREIZH

Bourc'hadenn Bruz, e kichen Roazhon distrujet pizh-rac'h gant ar Saozon

Div lev hanter bennak diouzh Roazhon, nepell diouzh hent houarn Roazhon da Redon, e oa ur gêrig sioul a Vreizh-uhel, bourc'hadenn Bruz, 600 den bennak o chom enni. Gouel bras a oa eno disul, 7 a viz mae diwezhañ, gant paskoù ar vugale. Bodet e oa atav kerent, amezien ha bugale ouzh taol, pa zegouezhas kirri-nij ar Saozon, war-dro hanter-noz, da lav-

ar vro, a zo bet lazhet gant e holl diegezh. Ao. Person Bruz a zo bet gloazet grevus. E ti an Ao. Limeule, e oant 27 ouzh taol. Lazhet int bet holl.

Intramant bras a zo bet graet d'an dud varv, dimeurzh, 9 a viz mae, e kêrig amezek Chartrez, dirak ur mor a dud. Renet eo bet an ofisoù gant an Aotrou Roques, arc'heskob Ro-




En iliz-se, e oa bet, e-pad an deiz, kantikoù, gouleier flamm, ha levenez, gant Paskoù ar vugale. Setu e pe stad eo bet la-kaet gant ar Saozon.

(Kl. Ouest-Eclair.)

rout eo dek eur gant an eur gozh. Hag ar vombezadeg o kregiñ kerent. Dre gantoù e voe taolet bombezh hag torpilhez war ar gêrig reuzeudik. N'o devoe ket amzer an dud da de-c'houst, ha teo'houst da belec'h ? rak kouezhañ a rae bombezh ivez er parkeier war ar maez. Freuzhet, tang-wallet ha pulluc'het e voe ar vour-

zhon. En iliz e oa an AoAo. Robert Martin, prefed-Meur Breizh, Bouché-Leclercq, prefed Il-ha-Gwilun, Cha-teau, maer Roazhon, hag holl bennadurezhioù an Departamant.

Lakaet eo bet ar c'horfoù en ur foz hir e bered Chartrez, da c'hortoz o douaridigezh e bered o farrez, diwezhatoc'h.



Eno e oa ur gêrig koant gant tiez kempenn, bodet start endro da iliz ar barrez. An tiez n'eus ken roud anezho zoken; diskaret int bet rez an douar. Chom a ra en o sav mogerioù an iliz tangwallet, evel un testeni eus gouezoni an nijerien saoz.

(Kl. Ouest-Eclair.)

o'hadenn dindan ugent munut, ha nebeutoc'h. N'o deus mui an dud a zo ohomet bev na ti nag aoz. Heñvel eo ar vourc'h hag ar maezioù tro-dro ouzh ur vengleuz a vefe bet toull-didoulet gant diskianted.

Gwashoc'h, tennet a zo bet betek-hen a-zindan an dismantroù 192 korf marv, muturniet, un euzh, an darnvuiañ anezho. Niver ar re vac'hagnet — kalz anezho o vervel e klanvdiou Roazhon ha tro-war-dro, — a ya en tu all da 75.

An Ao. Joly, maer ha depute kozh

N'ankounac'hait ket kef

"BREZHONEG AR VUGALE"

(Kont-red-post Roazhon 121.10 war anv L. NEMO, 110, boulevard Metz, Roazhon.)

Levraouegou ar Framm Keltiek

Setu amañ un darn eus lizher ur c'henskriver eus Bro-Dreger :

« Bet am eus al levrioù kaset din gant Framm Keltiek Breizh :

An ti satanazel.
C'hoariva brezhonek.
Kontadennoù a Vro-Skos.
Trema an heol o sevel.
Traoniennoù ha kantiennoù mor.

« Setu bremañ 42 levr el levraoueg. Va digarezit, mar plij, da vezañ daleet da skrivañ deoc'h evit ho trugarekaat ; dre ziouer e amzer e oa.

« A drugarez Doue, ne chom ket al levrioù da vorediñ en armet. Ma n'omp ket niverus evel lennerion (seizh omp), e lennomp an holl levrioù gant plijadur hag ez adlennomp memes darn anezho.

« Eus al levrioù diwezhañ am eus lennet « Kontadennoù a Vro-Skos »,

« An ti satanazel » ha « C'hoariva brezhonek ». Bourrus-kenañ int. Sur on e vo lennet hag adlennet ar re-se. Spi am eus e kresko niver al lennerion, met fellout a ra din o dibab. »

Nevez-voulet :

SINDBAD AR MARTOLOD

diwar "Ar Mil Nozvezh hag Unan," aozet e brezhoneg

gant Roparz HEMON Skeudennoù gant Z. HAAS

PRIZ : 30 LUR

LES ŒUVRES BRETONNES 7, r. des Francs-Bourgeois, Rennes

« — Sur-mat ez eo kounnaret ! Petra en deus graet eus Brunev kaezh a garfen gouzout. »

E kalon ar breur Eustach edo o stourm an aon hag ar guriusted.

Ar guriusted an hini eo a c'hounezaz erfin.

Tostaat a reas da Veleur en ul lavarout dezhañ :

« — Arabat deoc'h va dantañ, paotr, pe e torran ho penn deoc'h gant va strobhad-ale'houezioù. »

Goude e tivinwaskas ar marc'heg.

« — Ho Prunev », a grias dizale Melear o fuc'hañ, « ho Prunev, ul lampon eo ; evel doc'h-c'hwil hag evel an holl re hag a vev er manati milliget-mañ. Fidamdoustik ! Gwelout a raimp ha ne vo ket talvezet deoc'h gant Frañsez A Vreizh an taol-dismegañs-se. »

« — Aotrou », eme Eustach souezhet, « ha n'eo ket an dug Frañsez ho lakaas da vezañ prizoniet amañ ? »

E-lec'h respont, e voe bountet rust-tre gant Melear a gostez, pignat a reas hemañ gant an diri a-bevaroù, ha difoupañ er sal-debriñ e-lec'h m'edo prokulor an abad o koaniañ e-ser e venec'h.

Diskouez a reas Melear e zaouarn liammet ha goulenn justiz en anv an dug a Vreizh.

Selloù ecun a baras Gwilherm Roperzh warnañ.

« — Ho kwelet em eus dija e chantele an iliz-veur », emezañ yen-tre, « pa voe mezhekaet al lazher-e-vreur dirak Doue ha dirak an dud. »

« — Al lazher-e-vreur ? » eme Veleur sabatuet, « daoust hag eo eus an Aotrou Frañsez e komzit evel-se ? »

Ne respontas ket Gwilherm Roperzh.

« — Diliammit e zaouarn d'an den-se », emezañ. « Mar bije bet ar gêriadenn a voe tangwallét dec'h war douaroù Menez Sant-Mikael, ne dafe ket kuit ez-vev eus ar manati-mañ, m'hen tou ! »

« — Ur gêriadenn dangwallet ! » a vesteodas Melear.

« — Kae kuit ! War e dremenvan emañ an dug. Peditiñ a ran an Aotrou Doue da lakaat keuz en e ene. »

« — Evit gwir », a soñjas Melear, en ur bellaat, « ret d'an dug Frañsez bezañ hanter-varv, pe ouzhpenn zoken, d'ar manac'h-se da zistagañ seurt komzoù. C'hwitet em eus war va zaol, milgurun ! »

Er porzh e kavas e soudarded ouzh e c'hortoz.

(Da genderc'hel.)

Pell diouzh ar Vro

PARIS

UR VREIZHADEZ KOLLET HE HENT GANTI, E TOULL HE DOR. — E lec'h skeiñ war dor Kêr-Vreizh, 43, stradaed Sant-Plasid, eo aet ur baourez da c'houleñ digor en ti nesañ, niverenn 41. Eveljust n'he deus ket kavet pezh a glaske peogwir e lenner war bajenn diwezhañ « Je Suis Partout », niverenn 660, 7 Ebrel 1944, e-touez an embannoù :

Breizhadez, 42 vloaz, a ouenn uhel, c'hoant dezhi kaout darempred gant u. b. desavet mat. JOELLE, J. S. P., embannerezh.

Ma n'eo ket un druez ! Hag em eus soñjet reiñ da c'houzout d'ar baour kaezh Joelle e gavje-hi e Kêr-Vreizh e leizh a dud a-zoare ! Kargidi, ijinerion, studierion a bep seurt hag, evel-se, kelennerion war ar c'hembraeg, ar brezhoneg ha me' oar me... : holl dud a spered uhel hag a gar o bro.

Ne gomzan ket eus ar merc'hed n'eo un drugar o gwelet dont ken niverus da studiañ, war ar sizhun, ha bezañ ken aketus war-dro prezennoù brezhonek da sul ur wech pe ziv ar miz.

Neuze Itron pe Dimezell Joelle, deuit-tre hardiz e Kêr-Vreizh, met na zisoiñ ket ! Niverenn ti ar brezhoneg eo an 43, ha neket an 41 ma vez graet fae war hol lennegezh gant Jakez Ar Bouloñjer.

A. GWAZDOUB.

Ar Vrezhoned dre ar bed

Lanuoniz e Paris

Disul 23 a viz Ebrel e voe graet, da 15 eur hanter, e palez « ar Mutualité » Paris, ur brezegenn gant an Ao. M. An Toazer, alvokad e Lanuon, Kudenenn « Divroadur ar Vrezhoned » en Amerika hag e Bro-C'hall, dreist-holl e rannvro Paris, a voe dirouestlet dirazomp eus ar c'hentañ.

En em harpañ a reas ar prezegennour da gentañ war an taolennoù-rolloañ-tud diwezhañ e Paris ha da c'houde war un taolennadur diwar-benn tud ganet e Lanuon hag aet e-maez ar vro da c'houñt o buhez. War 5.220 den ganet e Kêr Lanuon, 2.904 a ernaezias ha war 360 den divroet e Paris hepken, ne deus nemet 12 hag o defe tapel ul lec'h-ladur a-bouez. Ar re all n'int nemet implijidi a bep seurt-ha gobr-devezourion. Labourat a reont en uzinoù-bras an aezhenn-glaou-douar, ar c'hirritan boulin pe ar « metro ». Lod all a labour er c'hlanvdiou hag niverus-mourhet eo ar vevlion e ti tud pinvidik. Gwelout a reer ez eus 348 den (paotred ha merc'hed) hag eo distret distret o doare-bevañ, evel just. A-wale'h e wefe dezho ur c'hleved bras pe chom dilabour un toullad

mizioù d'o c'has da baour-raz, rak anat eo o deus muloc'h a vugale eget ar Barizianed.

Diaes eo lavarout pizh pegement a Vrezhoned a zo divroet er bed a-bezh met dre vras e c'heller kontañ ez eus 700.000 bennak anezho ganet e Breizh, pezh a ra ouzhpenn 2 villon gant o bugale.

Ar perak

eus an divroidigezh

Pescurt abeg e roer d'an divroedeg-se ? Da gentañ, hoal ur gopg uhel a zedenn tud ar bobl, poan gante bevañ en o bro goude brezelioù 1870 ha 1914. Da c'houde, n'eus e Breizh ijnerezh ebet, kouls laret. An dud pinvidik ne lakaont ket o arc'hant da sevel tiez mat evit ar bobl na da sikour al labourerion-douar, pa vez fall an traoù gante ; e lakaat a reont en tiez-bank a gas anezhañ e-maez ar vro hep talvoud-gezh ebet evit ar Vrezhoned.

A-hend-all gouarnamant Bro-C'hall ne ra kazi mann evit kreskiñ pinvidigezhioù douar-labour ha douar-kon-dou Breizh ; ar porzhioù bihan pe vras a vez lezet a-gostez da skorañ re Vro-C'hall ; re nebeut a skoliou-micher a vez kavet e Breizh. Mistri ar mererezh-stad n'int ket eus hor Bro ; rak-se n'eo ket i a cheñchoù penn d'ar vazh. Ret eo 'ma d'ar Vrezhoned o-unan en em unaniñ. « Unvaniezh a ra Nerzh. » Pa vint kreñv a-wale'h hag o c'houzout diouzh o nerzh e c'hellint rediñ mistri Bro-C'hall da wellaat stad hor Bro.

A. GWAZDOUB.

MOUEZH HOR RE YAOUANK

KERSE

'Vit hiziv n'em eus ket da gavet c'hoazh ur wech,
O siwazh deomp, perak ? Deuet e oan fiziek.
Tridal 'rae va c'halon dinec'h ha direbec'h ;
N'em eus gwelet da skeud, avat, o tiredek ;
N'em eus klevet dason, dason da vouezh ken c'hwec'h.

Neuze ez on aet kuit, skeud me va-unan-penn,
Skeud trist e-kreiz an deiz, en avel disebtant,
E fin an endervezh, en disheol o tremen.
Deut 'oan gant plijadur, ur blijadur wallzrant ;
N'eo bet lezet ganin nemet va bec'honant.

Ha te ? Pelec'h edos ? Petra 'c'h eus gouzoñvel ?
Gloazet omp bet hon-daou gant arar lemm ar reuz.
Ganeomp evit-se 'la petra 'zo c'hoarvezet
A zifenn deomp frammañ hon eneoù digeuz ?
Ivaos envel kement : tra gasaus, un euzh !

Eus ar bed ne reomp forzh, re greñv hor c'harantez !
Pa vezomp disrannet an eil diouzh egile
Ne zivian war hor gweiz ken sklaer hol levenez.
Diskaret hon eus trumm drefen, hon dispartle ;
Gellout o adsevel piv eta her gellfe ?

Tra ebet ne c'hella, tra ne ouezo biken
Beuziñ en ankouac'h dameñvor hon eurvad,
Daoust da vras e teufe hor glac'har, hon anken.
Ar bed-mañ a zo deomp 'vel un istonk hep strad,
Unan all a vennomp, unan all o wellaat.

Netra ne vern deomp-ni, zoken ur vuhez c'har.
Mar deo eus ar c'hevriñ 'veldeomp un adsked leal.
Liammet omp da viken, er vuhez hag er marv,
Ne vern deomp ar c'horfoù ! Hor spered 'nij uhel !
Hor c'harantez diboulc'h ne c'hella ket mervel.

Ar c'hoazh en em welimp et-dro, va dous karet ;
Evel d'ar wech kentañ estlammet ha divoaz
E vimp, mar plij da Zoue arve en em gavet.
Pa zistroin dit-le 'vi ouzh va gortoz c'hoazh.
Ni a gomzo laouen evel a holl viskouzh.

K. G. (4 Meurzh 1944.)

Ma ne ve ket bet ar minwask daonet-se war e c'henou en dije youc'het. Minwasket-mat e oa avat.

E ziouhar hepken a oa diliamm. Ober a reas ganto, da gentañ evit treiñ-distreiñ en e doullbac'h evel unan posedet, da c'houde evit skeiñ evel un dall war an nor prenn derv.

Met, sur, ar gwir o deus ar brizonidi da zidaeriñ dre skeiñ gant o zreid war dor o zoullbac'h.

Ouzh taolioù ar marc'heg Melear ne daole den pled.

E-tro peder eur diouzh an abardaez, erfin, e wigouras un alc'houez er botailh.

« — Arsa, Brunev ! » eme ur vouez diwar an treuzoù, « ha te eo a ra ar safar-se ? Perak emañ da alc'houezioù aze ?... Met, n'emañ ket Brunev amañ... Pelec'h emañ ? »

Ne voe ket, evel just, Melear evit respont.

En em lakaat a reas dirak an hini nevez-deut. Breur Eustach e oa ; hag eñ da soñjal :

« — Liammet en deus Brunev e zaouarn d'ar prizoniad ha lakaet ur minwask war e c'henou... marteze ez eo kounnaret. »

Dindan e vinwask e laoske Melear yudadennoù iskis.

HOR C'HONTADENN KOFESION GENTAÑ FAÑCH VIHAN

« — Mamm », eme Fañch en ur zegouezhout er gêr eus ar sko. « an aotroun kure en deus lavaret din ez on barrek da gofes. War-c'hoazh goude lein en deus c'hoant ez afen gant va c'hamaladed. »

« — Hag ez i, va mab, peogwir out bet kavet gouest da vont », a lavaras e vamm.

D'an deiz warlerc'h, setu paotred vihan ar skol, o vont etrezek an iliz, ha Fañch en o zouez, na petra 'ta, lorc'h ennañ abalamour na oa bet resevet da gofes. Bremañ, e soñje, e oa deut da vezañ kalz brasoc'h eget ar re all na oant ket bet degemeret; bremañ e oa deut da vezañ ur gwaz.

Gouennata e vamm en doa graet a-raok mont, evelato, ha meur a wech zoken, diwar-benn ar pezh en divije da lavarout.

« — Ha, va holl fec'hedoù a rankin lavarout, mamm? » en devoa gouennet. « Daoust hag an aotroun kure ne daio ket d'o diskuilh d'ar re all? »

« — Arabat eo dit kaout aon, mabig, war ar poent-se; ne lavaro ger da zen; bez dinec'h! »

« — Neuze e rankin lavarout ar pezh em eus graet a fall. Evel en deiz all, em boa sachet war lost ar c'hazh, hag en devoa krabiset din va dorn, zoken. Evel ar c'hi, em boa roet dezhañ un taol bazh, dre ma oa droug ennon, o vezañ ma oan bet gloazet gant ar c'hazh. »

E-kreiz ma soñje er pezh en divije da lavarout, setu deut tro Fañch da vont er gador-gofes. Ma oa lorc'h an tamm anezhañ a-raok, ne rae ket kalz a ardoù breman.

Aet e gamalad tostañ er-maez eus ar gador-gofes, setu hor paotr o vont e-barzh. Daoulinañ a ra war ar skaoñ vihan. Pleget e benn gantañ, e soñj er pec'hedoù bras-sponsus, war e veno, en deus bet graet. Rak evitañ, dianaudek c'hoazh eus fallagriezhoù ar bed-mañ, e oa un taolig fall a netra ur pec'h bras. Edo a-zevri o pleustriñ war e gofesion, stouet e benn gantañ, pa zigoras an aotroun koveseur an norig o dispantie. En ur zigeriñ a reas houmañ trouz, hag ar paour kaezh Fañch, na oa ket o soñjal en dra-se, spontet en un taol, a lammaz er-maez eus ar gador-gofes en ur c'harmiñ : « Mamm! Mamm! ». Neas ket da bell, chom a reas e-touez e ga-

maladed a oa eno, daoulinet c'hoazh war o c'hadorioù.

A-nebeudoù e tisponas Fañchig kaezh. Goude bezañ bet frealzet un tammig, ne c'helle ket evelato mirout a sellout ouzh ar gador-gofes, evel m'en divije aon outi.

« — O! me 'm eus bet aon », emezañ, « me 'gave din e oa ar gador-gofes o pilat warnon, kement a drouz he doa graet. »

O welout e chome pep tra sioul, goude ma voe displeget dirazañ gant ar c'hofesour, a oa deut er-maez, petra eo a oa ar penn-kaoz eus e spont, e kredas Fañch vihan mont en-dro er gador-gofes. N'eo ket evelato hep un tammig enkrez eo ez eas e-barzh.

Pa voe digoret an norig e reas zoken ur skrijadennig, met chom a reas evelato er gador.

Graet e govesion gantañ, e teuas er-maez. N'oa ket gwall faeüs an tamm anezhañ bremañ; mezh en devoa zoken dirak e gamaladed, da vezañ bet spontet gant ken nebeut a dra.

Paour kaezh Fañch vihan! Kavout a rae dezhañ bezañ dija ur gwazh ha padal ne oa c'hoazh nemet ur bugelig hag a sponte gant nebeut a dra. Evel ma lavare e vamm dezhañ :

« — An neb a sav re uhel e benn, a c'hell bezañ paket a-wechoù! »

YANN AR CHOUAN.

C'hoarzhomp un tammig!

AR SKOL HAG AR VUGALE
(Respontoù gwir)

— A 'ta Laouig! Petra 'c'h eus desket ar mintin-mañ, er eno?

— O, mamm! Traoù ken anaouus ma 'm eus prometet d'an Aotroun Doue koll ar soñj anezho.

— Petra 'rez er skol, Veig?

— Gorloz ma 'z aimp er-maez.

Er c'hatekiz.

— Hag anavezout a rit, bugale, e-touez oberoù Doue, an hini kae-rañ?

— Diskuizhañ.

Deut eo Jani vihan d'ar skol gant he loeroù war an tu enep.

— Perak emañ ho loeroù war an tu enep ganeoc'h?

— Un toull e oa war an tu gwir. Ne velle ket din e vije bet gwelet.

Ar foto rouestlet

gant Goulc'hen AR PAGAN

Eured Sezni Ar Rouch hag Augustine (Gouhlin, evel a lavarer du-mañ) Ar Go, unan eus plac'hed koan-tañ ar Pagan, a voe lidot seizh miz warlerc'h marv e dad. Iliz Kerlouan a voe leun-chouk d'an deiz-se, n'eo ket hepken gant Kerlouaniz, met ivez gant re Blouneour, re Wlseni ha re Bouldier, ker karet ha ker brudet ha ma oa ar Rouchet dre ar vro. Ur brezegenn belavar a voe graet dezho gant ar person.

Sezni a voe ur pistig en e galon, pa voe lavaret dezhañ heuliañ rou-dou o dad, un den kristen ma o oa bet unan, kerkoulz hag ur c'horo ampart war e vicher, a-unan gant e vab da zeiz e eured eus ar Baradoz ma oa aet goude ur vuhez onestiz.

Echu an deiz-se, en em zastumas an holl war blasenn ar voure'h, ma oa ouzh o c'hortoz ur paotr yaouank, gantañ dilhad boure'hiz. An tenner-poltredoù oa, deuet a-raodoz eus a Bloueskad da gemer, hervez kustum, foto ar priedoù nevez, o-unan da gentañ, hag asambles gant tud an eured da c'houde.

Brav e oa an amzer, ha digoumoul. Edo Augustine gant dilhad kozh-kozh ar Pagan, a vez douget bremañ da zeiz an euredoù ha da bardonañ er Polgoad. Ar gornetenn a oa war he fenn a oa bet koef he mamm-guñv d'hec'h eured ivez. Sezni a oa en e aes en e wiskamant du, e viz bihan krog en hini e zousig.

Echu e voe buan an abadenn gant paotr ar fotoù. Neuze e voe renket tud an eured ouzh moger an iliz ha, kemeret an eil foto-se, dav d'ar saldebril, ma oa bet aezet ur friko eus ar ro lipousañ evit ouzhpenn daou c'hant a dud.

Ur sizhun war-lerc'h, pa edo Sezni hag o wreg gant o merenn, paotr al lizheri a zegasas dezho ur pikol lizher, war e c'holoenn anv ha chomlec'h ar fotografi Sezni a zigoras al lizher.

« N'on ket evit her c'hompren », a skriva ar fotografour. « Ar foto em eus tennet eus tud an eured a zo deuet brav-dispar. Fall-tre, avat, eo ar foto all. Teñval eo, ha rouestlet. Pegen rouestlet bennak ma 'z eo, koulskoude, e kav din ez eus warni patrom un den all. A-hend-all, staget em eus ar skoudegn-da-c'hortoz ouzh va lizher, deoc'h da lavarout hag-efi e talv ar boan bezañ moulet, pe get. »

Sezni a gemeras ar skoudegn. Bras a-walc'h e oa, ha teñval ha rouestlet, evel a skriva ar fotograf. Evelato, ne oa ket re defval da virout ouzh Sezni hag e wreg d'en em anout. Ne oa ket diaes dezho, ken-nebeut all, anaout an trede den.

A-us da Sezni hag Augustine, Yann Ar Rouch, tad Sezni, ur mousc'hoarzh war o vuzelloù, a wareze ar briedoù nevez, evel pa vefe bet ouzh o vennigañ da zeiz o eured.

Gant an higenn d'an eoged!

A! Setu o tont va c'henell kozh, Fañch Ar Go, — Fañch Ar Go, eus ru Kereon, e Kemper, pesketaer ha chaseour touet. War e varc'h-houarn emañ. Diouzh e wiskamant: dilhad rouz fetis hag heuzoù kaoutchouk o sevel betek e vorzhedoù ha diouzh e stalkerezh: gwalinier, krog, paner, bazh-roued, h. a. e welan emañ o vont da bes-keta.

« — Ac'hanta! emomp o vont da c'hedona, paotr Fañch? »

« — Ya! dres!... Da c'hedona gant an higenn. Duzhet a daper, en deizioù-mañ, madik a-walc'h. »

« — Bremañ emañ ivez mare an eoged, neketa? Pelloc'h e pignout diouzh ar mor da deurel o greun er stêrioù. »

« — Pignat a dlefant ober, a-dra-sur. Mes ret eo dezho gortoz, peogwir n'o deus ket dour a-walc'h. N'eus ket bet, koulz lavaret, banne glav e-pad ar goañv, ha n'o deus ket dour a-walc'h da lammel dreist skelioù ar skluzioù hag ar chaoerioù. »

« — Klevet em eus, koulskoude, ur paotr Kastellin o fogasit e oa bet lapet gantañ, an deiz all, pemp eog brav er stêr Avon. »

« — Eoged gant o greun? E c'helle bezañ; alav e teu un eog bennak a-benn da dreizhañ ar skluzioù ha da c'hounit an dour dous. Betek-hen, avat, n'eo ket eoged gant o greun e vez pesketaet, mes eoged bloaz, anvet begeged. »

« — Soñjal a rae din e tistroe an holl eoged d'ar mor, goude m'o deveze hadet o vioù e dour dous ar stêrioù. »

« — Ober a dlefant. Mes e-touez ar pesked e c'hoarvez pezh a c'hoarvez gant ar gristenien: ar re lezirek, ar re zievezh, ar re glañvidik a chom da sñejañ, ha, goude, e vezont diwezhat. Tremen a reont ar goañv er stêr, koulz lavaret hep debriñ tamm; kaletaat ha krom-mañ a ra o muzelloù, evel beg ur sparfell; ac'hano o anv: begeg. Treut-gagn e zeont gant an naon, ha setu perak ivez e lammont ker lontrek war ar boued-higenn. Anat dit n'int ket koulz, war bell, da zibriñ hag eoged ar mor. »

« — O, met, gant ar strishadurioù, n'or ket mui figus! Degas din un dousenn begeged, treut hag all, hag e vi gwelet mat du-mañ... »

« Nemet n'eo ket aze emañ an dalc'h. Lavar din 'ta: ne gavez ket souezhus an dra? Mone-done ar pesked-se eus an dour-mor d'an dour dous hag eus an dour dous d'an dour mor? Hag ar memes pesked o tarempredit alav ar memes stêrioù! »

« — Eo, souezhus a-walc'h. Naren, avat, kement ha ma c'hellfe kredit, e sell eus buhez kuzh an eoged. Ar re o deus pleustret war an dra a lavaro dit ne da ket an eoged d'ar mor... »

« — A! evelato! »

« — ...Pe, gentoc'h, ne gultaont ket o stêr c'henidik. Displeget eo bet fraez abaoe un nebeut bloazioù, e kendalc'h ar stêrioù da redek en e naoz dindan ar mor, e-pad levioù ha levioù, hep en em gemmeskañ nemet. Setu! an eoged, zoken pa vezont er mor, ne dec'hont ket eus ar stêr e-lec'h e vont gant, ha n'int ket kuit da faziañ gant hent an distro, p'eo deut ar mare da skañvaat. »

« — Feson vat a zo ar bloaz-mañ gant ar peskerezh. »

« — Mechañs e vo higennet unan bennak. Evit komz heñvel ouzh ar wirionez avat, war dreutaet ez a ar peuriñ. Setu kant bloaz a zo, e veze lapet kement a eoged, ha melloù reoù, ma c'houltenne ar vevelten diwar ar maez, en o c'homanant, ne vefe servijet eoged dezho ouzh taol ouzhpenn tetr gwech ar sizhun. »

« — Abaoe eo bet cheñchet penn d'ar vazh. »

« — Ya! an eoged eo spontus niver o enebourien, pe, gentoc'h, ar re o gav mat, ha n'eo, ket ar paour kaezh pesketaerien ac'hanomp a ra ar muiañ a zistruj en o zouez. »

« — Te zo mailh war ar vicher. Peur eo bet graet gant da wellañ taol? »

« — A! a! a! Kred pe na gred ket, tapet em eus va eog ar brasañ hag ar pounnerañ — tost da eizh lur a boueze! — ur wech ma n'edon ket o pesketa... Ya! an devezh-sul, goude kreistlet, edon o pourmen war vord ar stêr Avon, hag o sellout, gant tud all, ouzh an eoged oc'h ober o lammoù estlammus a-dreist skluz. Toull-ar-Roued. A-daol-trumm, n'on dare penaos, e reas un eogur foeltr a doug-tig-penn hag e teuas da skeñf ouzhin kreñv va bruched. N'oa war soñj tamm ebet. Mes lavar dit avat e gwaskis prim va divrec'h war ar genaoueg hag... »

« — Ya! mar deo gwir, graet az poa, ar sulvezh-se, ur besketadenn vurzhodus. »

Y. DREZIN.
(Kemper, meurzh 1944.)

SKEUDENNOU A VRO-SKOS

gant Goulc'hen AR PAGAN

Souezhet e vije bet m'en dije unan bennak lavaret din, pa grogas ar brezel-mañ, ez afen a-benn nemeur da ober un dro e Bro-Skos, an hini na oa nemeti eus an holl vroioù keltiek (lakaet a-gostez enez Vanav) n'omp: boa ket gweladennet c'hoazh. Kement-se, evelato, a zeuas da wir: e miz Mae 1940 al lestr brezel a oan war e vourzh a zeuas da c'orian test da Zin Edin, Edinburgh ar Saozon, ha k'erbenn Vro-Skos. Ne gollis ket va amzer o c'henaozegezh e-pad ar seizh deiz ma chomas va lestr eno ha kement deiz eus ar sizhunvezh-se a voe implijet ganin da skoulmañ un tamm anaoudegezh gant traoù Bro-Skos, ha gant ar vro er c'hentañ peññ.

Eus ar seizh k'erbenn am boa bet tro da welout en digant, n'anavezan hini ebet par da Zin Edin. Bravoc'h kalz eo, hep douetañs, eget Londrez. Gwir eo, e kaven Din Edin en he bravañ: brav-tre e oa an amzer, ha tomnik dija bannoù an heol. Bleuniñ a lles seurt a oa e lorc'hoù-kêr. Nemet, ha pa vefe e kreiz ar goañv e vefe, sur on, an hini a ya da welout Din Edin evit ar wech kontañ a vefe souezhet o welout pegon mat eo bet savet ken Din Edin gozh, ken Din Edin nevez. Din Edin nevez dreist-holl. « Princes Street » a drouz un tamm mat eus kêr, otre ar « Waverley Station » hag ar « Caledonian Station ».

Heñvel a-walc'h eo Princes Street ouzh O'Connell Street e Dublin, ru vrasañ k'erbenn Iwerzhon ha lorc'h Dubliniz. Edeñ eo evelti, ha ken lodan. Nemet hiroc'h eo Princes Street, ha

mistroc'h ivez, gant al lorc'h a zo war un tu dezhi, ouzh traoñ kastell brudet-holl Din Edin.

Hemañ a zo e kreiz Din Edin kozh, lorc'h us ha raro. Evit mont di, eo ret mont a-hed krapennoù iski, stradaoù kozh ken naet ha ken propik ha re ar gêr nevez, pe dost. Stallioù le-vrioù a zo a-vern er stradaoù-se, enno e-leizh a levrioù war istor ar vro, war Zinedin hag ar c'hêrioù all a Vro-Skos, asambles gant levrioù a bep seurt evit ar studierien.

Brudet eo Din Edin evit he skol veur. Amañ emañ, er gêr kozh, loizennec, teñval ar pondalezioù hag ar stallioù studi enni (1). Digant ar porzhier e c'houlennis ohomlec'h ar penn-kelenner war ar yezhoù keltiek. Div wech ez is betek e di, kuit a welout anezhañ. N'am eus ket kalz keuz da gement-se, pa 'z eo gwir e lavaras din e valez o oa bouzar-mik, ha diaes-tre komz outañ.

Embannet eo vez e Din Edin ur gelaouenn e skoseg (pe gouezleg) penn-da-benn, — ur gelaouenn a seurt gant « Arvor ». — Lennet e vez gant ar studierien dreist-holl, am eus kavet, ha gant ar baotred yaouank. Rak n'il ket da zisofjal n'eo bet soudardet pe vartoletet paotred yaouank Breizh-Veur nemet tamm ha tamm ha kalz diwezhatoc'h eget e Bro-C'hall. D'ar mare-se — miz Mae 1940 — e oa c'hoazh en tu all eus Mor Breizh an darnvulañ eus ar yaouankiz pe war ar studi, pe gant he labour kustum.

Brezel a oa, evelato, ha diaes e vije bet chom hep her merzout. Ne gomzan ket eus an teñvalaat, pa 'z

eo gwir n'am eus biskoazh merzet e voze teñvalaat ar ruloù da serrnoz: dalc'hit soñj e vez an nozioù e Bro-Skos herroc'h eget ma 'z int du-mañ — soñj am eus bezañ lennet aes-tre ur gelaouenn war vourzh va lestr da unnek eur hanter dlozh an noz, e donvor da Zin Dha. Nemet, lakaet a gostez an teñvalaat, e oa anat e oamp en amzer vrezel. Pikolloù skritelloù a zegase soñj eus



ar brezel. (Dig for victory! Eat more potatoes!) Strishadurioù a oa en tiez-boued, pa ne oa hini ebet koulz lavarout e Brolzh d'ar mare-se. Boda-dennoù a oa ivez ma veze kaoz eus ar brezel digant tud a-du gantañ, digant sosialisted, komunisted, mirourien ha tud a bep seurt. Skritelloùig am eus gwelet ivez war ar mogerioù a-enep ar brezel, dreist-holl e tro ar Skol Veur: rebec'het e oa d'ar Saozon ober eus Skosiz « pourvezioù-kanol », hep damant outo.

Kement a amzer a voe rekis din da welout ar mirdioù, al levrioù hag an ilizoù — hag ouzhpenn, e oan

o vont d'hen ankounac'haat, ur stal-vinaoñ, an hini vrasañ, a gredan, e Bro-Skos — ma n'on ket bet evit mont da welout ar c'hêriadennoù trowardro. E Dun Dha (da lavarout eo « torgenn Doue », Dundee ar Saozon), o lec'h ma corias va lestr goude kuitaat porzh Din Edin, am eus, er c'hortol, talet nebeut a ovezh ouzh kêr. Dun Dha a zo evidon-me ur gêr a zo kaeoù, kaeoù, ha kaeoù c'hoazh ouzh her ober... hag ul lec'h ma vez debret « orange-marmolade » eus ar ro lipousañ: koulskoude, istor Dun-Dha a zo pell da vezañ boutin ha dister. Teirvet kêr ar vro eo deut da vezañ, hag unan eus ar re a enebas ar c'hêlatañ ouzh ar Saozon. Brudet eo dre Vro-Skos al lazhadeg a voe graet eus tud Dun-Dha gant Monk, letanant Cromwell, e 1651.

Ma n'anavezan ket mat Dun Dha, d'an nebeutañ eo'n anavezan he rannvro gwelloc'h: an dek deiz bennak ma chomas va lestr e Dun Dha e tennis va mat diouto evit bale er vro, gwech war va zreid, gwech all gant ur c'harr. Unan eus ar baleadennoù a ris a biljas din ar muiant a voe houmañ. Gant ur c'harr-tan digor ouzh an avel ez is betek Kirriomuir, dre C'hiamis (n'anavezan ket anvioù skosek ar c'hêriadennoù-se, nemet an anvioù saoznek a zo moarvat tost a-walc'h dezho), o tistrell da Zin Dha dre Forfar hag Arbroath. E-kelt ar valeadenn-se am eus « tennet » un nebeut fotoù, a ziskouez pegen torgonnek eo ar vro, menoziek zoken. Amañ hag ahont e weler kestell brav, lorc'hoù bras-bras endro dezho, en o zouez hini tudoù rouanez Vro-Saoz, anozhi ur Skosez, evel a ouzoc'h. Saozon a zo deut da glask repu du-mañ, pa voe graet eus ar rannvro-mañ ur « safety area », un tamm douar diriskl an amzer vrezel. Peuriñ a ra en traonlennoù bandennoù defved, defved eus ar re vrasañ, war o h'eln ur gloan stank ha fonnus. Klasket em eus pakañ ur vandenn anezho war unan eus ar fotoù; met teo'hot o dous diouzhin, hep din gel-lout pakañ ouzhpenn tri.

En unan eus ar c'hêriadennoù a

dromenis drezo d'an deiz-se e voe lavaret din e komze skoseg plac'h ar sal butun. Ha me d'he gwelout. Ouzhpenn gouzout skoseg a-vihanik, ur goantenn o oa ivez. Goude prenañ diganti ur pakad sigarettennoù, e chomis un tamm da gomz outi. Mont a raen dezhi e saozneg, ha souezhet-bras e voen diouzhito o welout pegen distaget-fraezh ha pegen flour e oa he saozneg, e-keñver ar brizh saozneg a vez komzet er rannvro-se. Gindik e oa eus kontolezh Inbhir Nis (Inverness). Da c'houde am eus desket ne gomze ar plac'h-se nemet ovel an holl re a oa ovito ar skoseg yezh o c'havell.

E kêr-Arbroath am eus gwelet an abati brudet, ma voe embannet ennañ e 1320 an anvadur pouezusañ e istor Bro-Skos: « Anzavadur disujdigezh Bro-Skos » an hini eo. Pa ne vefe ket an anvadur-se, an abati-se, leun a vourdez evel m'em-mañ, a dalveze drezhañ e-unan ar boan da vezañ gweladennet.

Tremen a ris ivez ur week-end e Obhar Dheatan, a zo Aberdeen evit ar Saozon. An anv saoznek, pe gentoc'h an anv implijet gant ar Saozon, a ro da soñjal e vefe Obhar Dheatan, pe Aberdeen, krouet gant Bretoned ha n'eo ket gant Gouezled eo. Skol veur Obhar Dheatan a zo anavezet mat. Hec'h iliz veur ivez, iliz veur sant Mac'har, anezhi un iliz kozh a zo gouestlet d'ur sant a oa bet kaset, war a lavarer, da visioner d'ar Biktet.

Amzer a-walc'h n'am eus ket bet, siwazh din, da vont d'al lod eus Bro-Skos ma vez komzet gouezleg. D'an deiz war-lerc'h va distro eus Obhar Dheatan e kuitae va bag kae Dun Dha da zistrell da Vrost, o tremen e-bloc d'an Inizi Ore'h (Ore'h e brezhoneg, Arcaibh e skoseg, Orkney e saozneg), hag e don vor da enez Iwerzhion, an enezenn o'hias a welan an tovennoù anezhi pell-pell, el-lantar.

(1) E Din Edin, e Glaschu, e Obhar Dheatan ez eus skolioù meur, enno kelennerien war ar yezhoù keltiek. Nemet e Breizh...